

(344)

Cantic
Var Brezel Spagn.

Var ton : Clêvit, nobl ha partabl.

Rentomp enor ha gloar da Zoue hon armeou,
Mestr an ên, an douar, ha mestr an elemantchoù ;
Rentomp graçou dezan eus e oll madelezoù,
Roc certen digantan e teu hon oll victorioù .

Enoromp assambles ar furnez eus ar Roue ;
Enor ha gloar ivez d'an Duc mat ha d'e arme,
Pere, leun a gourach, o devez, en un instant,
Tennet a esclavach eur Roue bras ha puissant .

Ar Spagn, eun nebeut zo, a yoa ive dezoleet,
Evel m'e bet hor brô dre eur vanden tirantët,
Pere, leun a furor, a bille he ilisoù,
A zigore an nôr d'an dizuruz, d'an oll vigoù .

Ar Roue legitim a glasqe pep seurt moyen
Da arretê ar c'hrim ha da routen al lezen ;
Mes, trec'het dre valiç tud fall ha tud direoleet
A nespêt d'ar justiz, souden eo bet prisonniet .

(345)

Gourdrouzet dre 'r pougnard, gourdrouzet dre ar maro,
Certen, n'en devoa gard da refus netra dezô :
Pep tria a veze grêt ervez o intantion,
Ha gant ar Roue sinet, sur, a nespêt d'e galon .

Eur vanden tud impi, galvet gantêto ar C'hortez,
Evit e outraji a glasqe pep digarez ;
Direspêt dreiz - voder evit ar Religion,
O devoa, gantêto coler, touët he destruction .

Ar ve rou'h chassect demeus o oll gouentchoù,
Ar bêleg cunduet d'ar prison, d'ar chaffotou,

296

Anterionu discaret e peb leac'h, e peb contre,
Chetu ar gürer bortret demeus o impiete .

Dre 'r c'hlenvet, dre 'r brezel, dre 'r guernez ha dre 'r vocen,
Doue zeu d'o guerwel da zistrei oc'h e lezen .
Netra ne deus capabl da chench calonou mechant,
Nac o desaign coupabl da rannersi Ferdinand . (1)

Louis - Trivac'h neuze, o velet ar maleurion
Pere a zezole gement all a gontreou,
A gassas prontamant tud savant ha tud habil
Da c'houlen chenchamant ; mes peb tria voe inutil .

(346)

Hon Roue, mepriset, en deus recours d'an armou,
Pa ne deus gen remed ouc'h gement a valeurion .
Cant mil soudard vaillant, cant mil eus a Francisien
Eus an direclamant o deus trouc'het ar c'hrisien .

Pencas gallout cana oll furnez ar Prinç - Royal,
Ha gallout publia ar gourach dreist-ordinal
Eus an oll soudardet an arme victorius,
Er Spagn bet cumduet dre eur Prinç mat, generus !

Evel un dalm gurun, var bord ar Bidassoa,
Er excepti nicun, int erruet gat joa,
Decidet da vervel, pe da c'hounit ar victor
Var an dud criminel a ra deo eüs hac horror .

Et selaou davantach ho proposiou milliquet,
En istant gat courach varnerzo o deus tennet,
Hac ar maro souden, etouez an enimiet,
Evel eul lac'heden pantout zo en em sqignet .

Neus dervez evita na el counta eur victor,
Ne deus leac'h er vro n'o deffe bet an enor
Da drec'hi prontamant an adversourien touet
Eus hor gouarnamant hac eus an oll Vourbonet .

(347)

Ar c'hèriou a vrezel en ur moment gemeret,

(1). - Renvoi indiqué à cet endroit dans le ms. ; Lédan a oublié d'écrire la note .

297

Ar cheffou criminel hac o oll droupon trec'het,
 A brou selêr ha patant courach vras ar Francisien,
 Hac o attachamant evit ar Roue christen .

Ar Roue delivret eus a zaouarn ar C'hortez,
 Gato zo cunduet da Vadrid ha d'e balerz,
 Evit, evel guechal, leqat e liberte,
 Ober usach royal eus e, oll autorite .

Tenna eus e brison eur Roue persecutet,
 E leqat var e droun, ha chassal e dirantet,
 Cetu aze, certen, eur brezel a zo meulabl,
 Ha deom-ni, Francisien, eur dra vras hac enorabl .

O Providanç santel ! te a c'heus sur cunduet
 Hor cheffou er brezel ; te a c'heus-i preservet !
 Rentomp graçou dide eus da oll vad-oberou,
 Hac ivez d'an arme evit he oll victoriou .

Composet gant Yann ar Bras, eur Guiclan .
 6 a vis d'ù 1823 .

(Vol. VII, p. 344-347.)
 strophes non numérotées .